



Carte scolaire 2018, loin du compte pour le bilingue public en Bretagne !

Forte de ses 8000 élèves, scolarisés en classes bilingues breton-français à l'école publique, **div yezh Breizh**, association qui représente les parents d'élèves à l'échelle de la Bretagne historique, souhaite exprimer son inquiétude sur **la carte scolaire 2018** qui **ne répond pas** d'une part **aux besoins de postes supplémentaires** : 15 postes pour 29 demandés, et **ne suit pas le plan de développement** adopté en CALR en septembre 2017 d'autre part. Seulement 11 projets d'ouverture de nouveaux sites publics sont présents alors même que le plan de développement en prévoit 20. A l'exemple de **Lamballe** où des parents attendent de pouvoir faire l'inscription de leur enfant pour la rentrée prochaine.

Il apparaît par ailleurs que des ouvertures de filières bilingues se feront de manière concomitante à la fermeture de classes dans les établissements concernés : **Brest** Quéliverzan, **Carhaix** Kerven, **Argentré**, **Goven** ; ou dans la même ville : **Lannion** St Roch. Cela constitue un mauvais signe pour l'installation de l'enseignement bilingue au sein de l'établissement et des communes. Afin de respecter le choix de scolarité de chaque famille, il importe de garantir un climat serein.

Cette carte 2018 fragilise aussi l'organisation de l'existant. Div yezh Breizh rejette ces décisions de fermetures basées sur des éléments purement comptables.

Quelle organisation possible ?

- pour le **RPI Ploëzal/Runan** (22) avec initialement 1 classe PS>CE1 dans l'école maternelle de Ploëzal et 1 section CE2>CM2 dans l'école élémentaire de Runan
- pour **Redon** (35) qui devrait accueillir une cinquantaine d'enfants de PS> CM2 avec 2 postes au lieu de 3 cette année.
- Pour **Séné** (56) qui devrait accueillir des enfants de PS > CM2 avec 2 postes au lieu de 3 alors que le rectorat attend des effectifs pour l'ouverture de la section bilingue du collège Cousteau actuellement en projet dans la carte des pôles 2018-2019.
- Pour **Plouay** (56) qui continue de connaître une augmentation de son effectif global sur l'ensemble du primaire et cherche à renforcer sa section collège.
- Pour **Rostrenen** (22) à qui on impose une fusion maternelle/élémentaire pour arranger une gestion comptable des élèves qui resteront physiquement séparés dans des bâtiments distincts avec une complexité d'organisation pour une répartition équilibrée des classes multi-niveaux.

Quelles conditions d'accueil et d'apprentissage pour les enfants toujours plus nombreux, y compris dans des classes multi-niveaux ? Autant **nous défendons les bénéfices du multi-niveau pour les enfants, autant nous considérons qu'il est nécessaire de donner aux enseignants des conditions adéquates**. Les fermetures annoncées ne vont pas dans ce sens. Nous demandons aux directions académiques de bien vouloir revoir ces situations dans le détail de la réalité de l'organisation des écoles concernées.

Bien qu'une partie de la Bretagne connaisse une perte importante de sa population scolaire depuis quelques années, l'enseignement bilingue public, à contrario, continue de voir ses effectifs augmenter. Il ne doit donc pas servir de variable d'ajustement, autant dans les établissements que pour la carte scolaire globale en Bretagne. Il est **primordial d'avoir une carte scolaire** pour l'enseignement bilingue **en adéquation avec la progression** constante et régulière des effectifs qui se confirme chaque année : +7% à la rentrée 2017.

L'évolution de la législation qui renforce l'assise des langues et des cultures régionales (Loi N°2013-595 du 8 juillet 2013) et qui précise que leur enseignement doit être favorisé (article 40 modifiant L.312-10 du code de l'éducation), doit amener les services académiques à en prendre la pleine mesure pour la **35^{ème} rentrée des classes bilingues de l'école de la République**.

Contacts pour la presse : Judith CASTEL
02 96 49 12 08 ou 06 17 79 40 56
rouedad@div-yezh.bzh

Vonig FRAVAL
02 96 49 12 05 ou 07 84 95 98 57
renerezh@div-yezh.bzh

Présidence div yezh Breizh : Rémi TOULHOAT
06 81 30 34 24
remi.toulhoat@div-yezh.bzh



Kartenn-skol 2018, pell eus ar gont evit ar c'helenn divyezhek publik e Breizh !

Gant 8000 deskard skoliataet e klasoù divyezhek brezhoneg-galleg er skolioù publik he deus c'hoant kevredigezh rannvroel **div yezh Breizh** reiñ da c'houzout eo nec'het o welout **kartenn skol 2018** ha **ne respont ket d'an ezhommoù a bostoù ouzhpenn** (15 post diwar 29 goulennet) ha **ne glot ket gant steuñv diorren** votet er C'H/KAYR e miz Gwengolo 2017.

N'eus ket met 11 raktres digeriñ klasoù divyezhek er skolioù publik pa vefe ezhomm da gaout 20 anezho evel m'eo skrivet er steuñv diorren. E **Lambal** emañ ar gerent o c'hortoz enskrivañ o bugale evit an distro-skol da skouer.

Er memes koulz 'vez serret ur c'hlasad galleg pa vez digoret ur c'hlasad divyezhek e skolioù 'zo : **Brest** Quéilverzan, **Karaez** Kerven, **Argantred-ar-Genkiz**, **Goven** ; pe er memes kêr : **Lannuon** St Roch. Ur sin fall evit staliañ un hentenn zivyezhek er skolioù hag er c'humunioù eo. Dre ma 'vo un aergelc'h habask e vo aesoc'h d'ar familhoù dibab hervez o c'hoantoù skoliataerezh. En arvar e lak ar gartenn 2018 mont en-dro an hentennoù divyezhek. Nac'h an divizoù da serriñ klasoù a ra div yezh Breizh peogwir int diazezet war ar c'hontoù.

Peseurt mont en-dro ?

- Evit **KPE Pleuzal/Runan** (22) gant 1 c'hlasad Re vihan er skol-vamm>CE1 er skol-vamm Pleuzal hag 1 rummad CE2>CM2 e skol kentañ derez Runan ;
- evit **Redon** (35) hag a zlefe degemer un hanter-kant bugel bennak Re vihan er skol-vamm> CM2 gant 2 bost e plas 3 ar bloaz-mañ ;
- Evit **Sine** (56) hag a zlefe degemer bugale, Re vihan er skol-vamm> CM2 gant 2 bost e plas 3 pa vez ar rektorelezh o c'hortoz an niver a vugale evit digeriñ un hentenn zivyezhek er skolaj Cousteau raktreset e kartenn ar poloù 2018-2019.
- Evit **Ploue** (56) e kresk ingal ar c'hentañ derez ha c'hoant o deus da greñvaat an hentenn er skolaj.
- Evit **Rostrenenn** (22) hag a vefe rediet da vodañ ar skol-vamm gant ar c'hentañ derez da aesaat ar melestradurezh pa chomo ar vugale dispartiet an eil re diouzh ar re all e daou di disheñvel gant mont en-dro diaes da aozañ ha kaout klasadoù lieslive kempouezet. Peseurt doareoù degemer ha deskiñ evit bugale niverusoc'h niverusañ er c'hlasadoù lieslive ? Ha pa vez difennet ganeomp gounidoù ar c'hlasoù lieslive e soñj deomp eo ret reiñ doareoù dereat d'ar gelennerien.

N'emaomp ket o vont war an tu-se pa vez klevet ar serradennoù raktreset. **Goulenn a reomp gant renerien an akademiezh dont en-dro dre ar munud war o raktresoù en ur derc'hel kont eus mont en-dro pep skol .**

Daoust ma tigrsk mat niver ar skolidi e lec'hioù zo e Breizh abaoe un nebeut bloavezhioù e kresk c'hoazh an niver a skolidi en deskadurezh divyezhek. Ne c'hell ket ar postoù divyezhek bezañ implijet er skolioù pe er gartenn skol evit merañ ar cheñchamantoù. Pouezus eo kaout **ur gartenn skol** evit an deskadurezh divyezhek **a glotfe gant kresk** ingal an niver a skolidi : +7% en distro-skol 2017.

Dre cheñchamant al lezennoù e teu yezhoù ha sevenadurioù rannvroel da vezañ muioc'h anavezet (Lezenn N°2013-595 an 8 a viz Gouere 2013) ha da vezañ kelennet gwelloc'h (pennad 40 o cheñch L.312-10 kod an deskadurezh). Servijoù an akademiezh a rank doujañ ouzh an dra-se da geñver ar **35^{vet} distro-skol klasoù divyezhek skol ar Republik.**

Darempredoù evit ar mediaoù : Judith CASTEL
02 96 49 12 08 ou 06 17 79 40 56
rouedad@div-yezh.bzh

Vonig FRAVAL
02 96 49 12 05 ou 07 84 95 98 57
renerezh@div-yezh.bzh

Pennrenerezh div yezh Breizh : Rémi TOULHOAT
06 81 30 34 24
remi.toulhoat@div-yezh.bzh